

## KIS-518 – Davedenn ar yezh

(GE da AAB – 06 12 96)

E kement kammed a lakaer furmoù ar yezh d'ober ez eus ur parzh deberzhed, tided. Pa zivizer derc'hel ar furm lennegel *diwezh* ha degas a-du-rall ar furm arnevez *divez* dezneuziet diwar an henvrezhoneg, an daou o vezañ an un termen treadegel, pe c'hoazh pa zivizomp skrivañ *henn* ar raganv skrivet *hen* er yezh lennegel, e tistaolomp an abegoù ken soliet all a ve *ent yezhoniell* da zibab hentoù disheñvel evel doujañ da skouer d'ar “reizhstoregezh” pe d'an hengoun lennegel. Hag evel se evit kement devredad a yezhouriezh. E sigur ar ger-mañ diwezhañ end-eeun, en dibaboù graet gant VALLEE eus *-oniezh*, *-ouriezh* er sterioù o deus hiziv ez eus un tamm mat a didegezh. Ne vije ket bet deberzhedoc'h al lostger *-eg* evel e kembraeg gant an kez sterioù. Petra ra enta ez eo deuet dibab tided VALLEE da reolenn dimp ?

Ar respont zo : diazezet e vo diskoulmoù warc'hoazh war diskoulmoù hiziv, ken ez a an deberzh da retvez, an tided da zezvek. Ar yezh n'eo ket he davedenn dezhi he unan. Diorren ar yezh zo sevel hentoù d'ar vuhez : n'eus ken davedenn nemet denesaat ar yezh d'al lavar bev dre reiñ korf enni da gealioù eus ar bed ma vevomp, seul gent a se, dre grouiñ drezi kealioù nevez en araez da berzhiañ er vuhez kempred. An haeradenn-mañ zo a-walc'h da ziskar an tamall a aotrouniegezh bet lakaet war ar yezhourion. Ar retvez a zo er yezh ne zeu ket eus ar yezh, he istor pe he arverioù, met eus ar vuhez ez eo durc'haet dezhi. A se, pep ger nevez savet mat zo un treuzskuilh buhez d'ar yezh ha ne c'hell nemet reiñ levenez d'ar yezher yac'h. Ur saver hentoù a wel da gentañ pontoù derou ha dibenn an hent en deus da dresañ. Da c'houde hepken e sell ouzh an douaroù da dreuziñ, o prientiñ kefridi gwazadur an diberc'hennañ. Kalz eus ar re a ra war-dro ar brezhoneg ne welont nemet furmoù ar yezh en o c'heñver gant o hanez hag an arverioù a vez anezho e-touez an *terminal* ha zoken an *initial speakers* (MME a zifenne ar furmoù *moullañ*, *sellet*, h.a. oc'h arguziñ : ar re yaouank a ra ganto bremañ), oc'h ober anezho davedennoù enno o unan. Evel pa vije saver an hent o korntroiañ park Paol amañ a-gleiz, park Yann pelloc'h a-zehou e-lec'h troc'hañ ar parkoù dre o c'hreiz evit tresañ un treug eeun durc'haet d'ar pal.

Ar re a gas o c'hadi dre c'hourleur SADED, *Emsav* ha *Preder* o tibab ar germañ hag o tilezel ar ger-se zo o davedenn *brezhonegañ* ha stummañ *brezhonegerion* a seurt ganto, hep dremmwel estreget un hevelepted wellaet. Ne savont enep erlec'hiadur *geografiezh* ouzh *douaroniezh* nemet en anv ar wellaidigezh-se, ken e vije ar gwir gant arvererion *geografiezh* mard agent betek penn o gwenodenn etrezek hent bras ar gedvuhez ez eo ar galleg — ouzh amoed amoed hanter !